

Gôerz gôal-heurio a n'évage

1

Zilaët bugale breiz brô a n'everien giste
Comprenet bars ar ôerz ma kar beza eo triste
Evar sujet a n'évage ar lambic milliguet
Glac'haret tud a fesson tousesq ar bretonet.

2

Settu eun neubeud skoerô a goal heurô spontus
Dimeuz peurz a n'everien n'on kavet dangerous
Guelet ar kazetteno a n'on brô breiz-izel
C'hôec'h den lazet evar trô kavet marvô cruel.

3

Kichen ar Chastel nevez ebars ar Finister
Pesort maro bet ar vroeg dimeuz ar goas mevier
Scovet ma neva nezi ken pouner var i pen
Na me voa netra cause med zioas ar weren

4

Evei mab evel ar vam vel ive ar paotr koz
On tri viche leün oh c'hoff ar mintin d'a noz
A kredet an miser dû a c'hép bôet na dillad
Deva plijadur a bet nemed rond da kouskad.

5

Memez tra zo eruet ebars ar Morbihan
A kren tost da Pontivy gant eur mevier paysan
An devez kenta ar biôa ar n'archerien guelvet
Evar sujet an den ma lavaret n'on lazet.

6

Nemed c'herve lavaret evar ar kazetten
Eô gant eun tol pilon ar vrôg lazet i den
C'hôas zioas vóa ket maro ma deva ordrenet
Di mab cheta neza ar puits lec'h viche ket kavet.

7

Med a n'Ottro Maire paroz ive ar bobl an trô
Deva c'had scrivet goude d'enquetta ar marô
Ken-ken intoroget an daô di scupule ma
Founus discleret deva petra vóa gret deza.

8

A settu maint despunet ôh daô bars ar prison
Guelet nevez netra cause med ive ar boesson
Dre oll ma veza guelet divar pen a n'évage
Tristediguez bugale lakad bec'h ar menage.

9

Evel eo ar Côtes-du-Nord n'eur c'hornic a Treguer
Ma zo ive tri marô dimeuz peurz eur lonker
Dimeuz a paroz Tremel ebars canton Plestin
Eur chasseur gand fusil ma neva gret revin.

10

Antreet ebars eun ty gant ar vrôeg c'houlena
François na ma ket aze deuzet on d'in laza
Ken founus lavaret ia vóa daô ten partiet
An daô christen d'ar maro a zioas vóa scôvet.

11

Ar gôaz chomet var a lec'h ar crôeg kasset raktla
Da n'hospital Montroulez nemed renka marval
Ar Larc'her retorn d'ar guer da kouskad ni ouele
Pa neva n'on empôsonet kar marvet eo ive.

12

Settu aze mignonet marvo an terupa
Dre oll e gant a n'évage buez ouz an trista
A lec'h beza bevaf mad d'ober vad d'on kalon
Talc'hen on penno uhel tousesq an tud a fesson.

13

Guelet vez c'hôas gôal-heurio dimeuz peurz ar laeren
Kichen Raôen ma ket pel tremenet ar ôalen
Tri den yôang goude kôan n'on kavet eun nozvez
Armet d'a c'houlén arc'hent laza ar pen tieguez.

14

Veza guelet ken dre oll var ar kazeteno
Nemed laeren lonkerien a c'hober dizeurzo
Arok finissa tud kez fleuren ar bretonet
Dioalet da kemer skoer ouz ar sort c'hailonnet.

Divar leign Menez-Bré

(Ton : Danse Kerne)

1

An tre Callac à Guengamp ker Lannion, Pontre
Ma zo eun tossen uhel c'hanvet eo Menez-Bré
Enan kichen Sant-Hervé e ma gret eur compren
Var a n'oïl paozo trô vit ober eur kanen.

2

Ken-ken laked em speret n'on lakan da sciva
Songal eo da Péderneec varni ar place kenta
Tréglamus a Gurunhuel, Moustéru, Bourbriac,
Pont-Melvez a Bulat, Mael, Sant-Servais a Callac.

3

Duault, Carnoët, Plusquellec, Plourac'h a Calanhel
Lohuec, Chapelle-Nevez, Plougonver, Loc-Envel,
Memez Plougras, Loguivy a Plounévez-Moëdec,
Eve Plounérin, Trémel, Plufur a Lanvellec.

4

Tréduder a Plouzélambre, Plouaret, C'houarc'het,
Trégrom, Benach, Louargat, Bégard a Pluzunet
Kerauzern a Ploumilliau, Ploubezre a Caouënnec,
Buhulien, Lanvezeac, vel Berhet, Tonquédec.

5

Cavan, Prat a Mantallot, Quempervern, Troguery,
A Roc'h, Hengôat, Ploézal a Pommerit-Jaudy
Memez Runan a Plouec, Bréldy, Coatascorn
Vez guelel ar mogaden a sevel maez ar forn.

6

Landebaeren, Sant-Laurent a paroz Kermoroc'h
Vez guelel ar merc'hedo a soignal saout a moc'h
Evel ebars gare Squiffiec pe c'hani Trégonneau
Ouelan azeet ar chef a scriva ni bureau.

7

Vel an paroz Pommerit, Pabu a Plouisy
Vez anvezet ar men glas dimeuz briques var an ty
Settu echuet an trô nemed daô pe tri lamp
Eben eruet an Grâces a an ker a Guengamp.

8

Trô Perros a Lan-Treguer na ran ket kalz a ton
Na da Lezadre, Paimpol, Plouha na Lanvallon
Beza zo c'hôas pemo canton an corn ar brezonnec
Tù Corlay, Sant-Nicolas, Mael, Rostren a Gouarec.

9

Tremen ra n'oli amzer var tossen Menez-Bré
Kredet marvet Sant-Herve e gant ar paourenté
Savet voa d'an eur chapel var douar Péderneec
Vit talc'hen song da zouta gret ar foïro kezec.

10

Taer ar blôa zo anvezet scrivad mad ar lever
Evel ebars fonz Léon an Kerne vel Treguer
A ken-koulz da mis even da eost pe guengolô
Attaô vez kavet d'a chôas dimeuz kezec ar vro.

11

Goude beza kollet kalz deuz ôh tavoudeguez
Vez guelel var tossen Bré meur a pen tieguez
Finissa ran ma kanen divar leign Menez-Bré
N'eur lavaret kenavo d'a n'Ottro Sant-Herve.

12

Mez arok tiskan d'an traô vit eva eun taken
Ran eur sel var train Paris fila gand ar linen
Ken-ken tapan pen a nent arok deuzet a noz
A n'eür tol evar Breizis ma oll brassa benoz.

(Composet gant René GAC, deux Callac).